



# GUERS

GRÉT A NEVE EN HENOR DA

## SANT MAURIÇ,

Deus a behini ar chapell, ebars Sant-Vêq, en Breiz-Izel,  
a so meurbet hentet gant ar gristenien vad.

*Voar an ton anaveet.*

DISKAN :

O sant bras ebars an Envo,  
Goulennet evidomp graço !  
Ners hac iec'het, peoc'h ha pardon,  
Carante Doue n'hon c'halon !!!

Chilaouet, m'ho ped, Bretoned,  
Bue eur sant, eun den caled,  
Bue Mauriç, soudard Jesus  
Dirac Doue oll galloudus.

An eur glevet he oll boanio,  
Scrivomp dôn en hon c'halono :  
Red eo evit mont oll d'ar gloar  
Cavet calon voar an douar.

Goude hon Salver daou-c'hant vloa,  
Ebars en plenen Agona,  
En quichen Franç, eur vro brudet,  
Mauriç so bet merzeriet.

Maximien, impaleer,  
Enebour Jesus, hon Salver,  
A gasse gantan, d'ar brezel,  
Mauriç, en carg vras hac huel.

Ar c'habiten, he soudarded  
A voa, en mesq an' oll, brudet  
Dre ho ners bras hac ho c'halon  
Da difen ar vro hac an trôn.

Ouspen Mauriç hac he vanden  
A galon a voa christenien ;  
Hac, an eur douguen ar c'hleve,  
Ho devoa oll doujanç Doue.

An Impaleer dinatur  
A glew doare eun dud quen fur,  
Hac, gant eur fulor vras dallet,  
Mauriç a so gantan galvet :

Petra glevan, den maleürus,  
C'houi quen brudet ha quen nersus  
Hac c'houi a dilezo, eb mez,  
Doueo ar Rouantelez !!!

Mauriç, Mauriç, ma chilaouet,  
Ha c'houi dindana soudarded,  
Adoret oll an Doueo !  
Pe d'ar vue, pe d'ar maro !!

Neuse eun dorn voar he gleuve,  
He daoulagad voar-zu Doue,  
Evelt en eun de a victoar,  
Mauriç a lar d'ar prinç barbar :

O prinç ! ô mestr d'eus ar brassan !  
Soudarded omp doch er bed-man ;  
Mès gant joa vras en hon ine,  
Servijerien omp da Zoue !

C'houi ro dimp enor an armo ;  
Mès digant Doue an Envo  
Nimp m'omp eun dra so caër meurbet :  
Eun ine divlam a bec'het !

Rei a red dimp magadurez ;  
Mès Doue, dre he vadelez,  
A n'eus rei d'imp oll ar vuez :  
Dezan ar gloar, hac doc'h goude.

Na ordrennet dimp nemert mad,  
Hac nimp a scuillo dac'h hon goad.  
D'ho Doueo ! Oh ! nan, biquen,  
Na rimp nac esenç na peden.

Daou dra m'omp touet da viret ;  
Caret Doue, hac ho caret.  
Allas ! mar disprijomp Doue !  
Penos senti ouzoc'h goude ?

Hon breuder quer ho heus lazet,  
Ho maro na m'omp quiet gonëlet.  
Trikal are hon c'halono  
Ous ho guelet caër en Envo !

N'imp m'omp ar memes esperanç  
Hac petra benac gant fizianç  
E halfem difen hon bue,  
Marvomp ! marvomp evit Doue !!

Guelloch eo dimp mervel divlam  
Voar galon Jesus hac he Vam.  
Na vin quiet treitour d'ham Doue !  
Ia ! christen on, hed ma bue !!

An tyrant, an tigr araget,  
O voelet Mauriç quen nerset,  
Gant eur fulor eb hi hano,  
A gondaon Mauriç d'ar maro.

Neuse ar sant, a voez huel,  
A lar d'he dud aroc mervel :  
Couraj ! couraj ! ô ma breuder !  
O pebes gloar ! gloar ar merzer !

Hac voar ho daoulin, disarmet,  
Ho goug en noas ho deus roet.  
Ar bourew a sco didrue ;  
Ar goad a red gant ho bue !

Pessort calon na vije quiet,  
Gant ar glac'har, neuse, fraillet,  
O voelet tud, crenw er brezel,  
Evelh eun noan, oll o vervel.

An æle, gant pep curunen,  
A disquennas, an eur vanden,  
Da diguemer ho ineo  
Voar eun trôn huel en Envo.

Er memes amser an douar  
A ganas, en eur voez, ho gloar ;  
Rac en pep lec'h, hac en pep bro  
Doue n'eus douguet ho hano.

Bep bloa, Sant-Vêq, en Breiz-Izel,  
A wel pobl vras en he chapel  
Dirac ar sant, oll daoulinet,  
Da c'houlen graç, ners hac iec'het.

O lec'h quen caër, dre he hano,  
D'ar pelerin en he boanio !  
C'houi n'eus ar bonheur da gavet  
Eur lod deus he gorf biniguet.

Eno, sant bras deus an Envo,  
C'houi a ra cals a viraclo ;  
Dreist pep tra, nimp oll Bretonet,  
En hon c'halon n'eus he scrivet.

C'houi, tud dalc'het gant clenvejo,  
C'houi, tud eb ners en ho mempro,  
Tud gouliet, tud en glac'har,  
C'houi laro d'imp guelloc'h he c'hloar !

C'houi, pried mad hac mam dener,  
Petra n'eus quiet græt n'ho quenver ?  
Disec'het a n'eus ho taëro,  
Rentet ar peoc'h d'ho calono.

Buguelic paour en ho cavel,  
C'houi, den coz o vont da vervel,  
Hac c'houi iaouankis, en pep stad,  
C'houi a war galloud ar sant mad.

Ia, burzud caër deus hon Doue,  
Ar c'hristen mad en ped gant fe,  
Deus he ezom a n'eus graço ;  
Sant Mauriç so bras en Envo !

O christenien ! deut da gavet  
Eur sant gant Doue quen caret,  
Ho calon a santo, goude,  
Joa, bonheur, ners bras d'ho ine.

Sant Mauriç, mignon mad Jesus,  
A rei dimp oll graço nersus,  
Da chom gant Jesus de hac nos,  
Da vont gantan d'ar barados !!!

AMEN ! AMEN !

J.-L. R.....,  
Ptre.

Propriété de l'Éditeur, J.-F. LE GOFFIC.